

catalogue Ollivier n° 620<sup>B</sup>

(17)

# FRAJILITE AN DUD IAOUANK

(War eun ton rigolo)

Ni boa eur c'hogik iaouank oa du-man genem-ni,  
Oa kommansel da gana, mes brema na ra mui.  
Eun nozvez goude e goan, o tont eur zonj 'n e ben :  
Me a renk mont en noz-man, var digare pourmen.

Me renk ober eur bale, eun droyat var ar mez,  
Da glask he merc'h Perina digant an intavez.  
Peguir on hanvet kogik gant holl dud ar vro-ma,  
Me garfe kaout eur bolez 'vit 'n em zivertissa...

Pa 'm eus tapet an hano a gogik 'vit partaj,  
Vo red d'in kaouet parrez da gomans ma mensaj.  
Perin, merc'h an intavez hounez a zo d'am grad :  
Kanerez ha danserez, brillant he daou lagad.

Bonsoir d'ec'h-hu, intavez, setu me deut exprez  
Da glask ho merc'h Perina da hanter liegez,  
Rag keit ha ma vemp iaouank, or bo kontantamant  
Ha plijadur asamblez hep chagrin na tourmant.

Ma merc'h-me zo abredik eur blavez c'hoaz :  
Mar de kontant ar bugel, me na ran ket a gaz.  
Kousket eo en he quele er pen draon an ti,  
Monet a ran d'he c'havet, da c'houlen diganti.

Arsa, ma merc'h, emezi, na d'in-me leveret  
Ha c'houi zo kontant, paourik, de gevet eur pried.  
Berroc'h kavfet an amzer bremen epad an anv  
Ha tom a doc'h ho kuele, goude pa zeui ar goanv.

O ia va mam, emezi, serten me zo kontant  
Demeus a greiz ma c'halon da gaout eur pod iaouank.  
Mar de kaner ha danser hag eur pod dilikat,  
Neuze am eus esperanz d'ober tiegez mad.

Neuze ar pod iaouank-man a zo joaüs ha gie  
Hag a zistroas d'ar ger, hed an end 'n eur gane.  
Penoz eta, Yan Gogik, te zo bet o vale,  
Eun tam mout divezat o c'hanons d'omp an de.

Netze zistroal ouzin ganl eun air da c'hoärzin :  
Mar de guir on-me kogik, c'houi zo eur louarn fin.  
C'houi pefe eur vadelez da vont bremen raktal  
Da anons ma dimezi betek ar presbital.

Ar c'hoärz var ma muzelliou, pa n'on ket vit miret :  
Ia va mignon, emezan, me rei ze, na re ket ;  
Monet a ran evidoc'h beteg ar presbital  
Rag merc'h an intaneyz evidoc'h ne ket fal.

Bonjour d'oc'h, otrou person, me a zo deut gant prez  
Da c'hout ha c'houi zimefe eur c'hog bag eur bolez  
Pere o deus dezir bras da veat uniset ;  
Eun tamic a zo dija o deus en em choazet.

Neuze a respondas d'in ive 'n eur vouze'hoarzin :  
Deus aman abarz zal, kemer eur bane guin.  
Eroët e zout bepred, eun tamik de kevier,  
A teus klevet jamez ve dimezet ar yer.

Ezkuzit, aotrou person, mar meus drouk parlantet :  
Malheur eo d'an dud iaouank, pere zo lezhanel.  
Ar re a barlanton d'oc'h a zo daou zen iaouank  
A zezir be unisset vel diou galon gontant.

Ar re a barlanton d'oc'h zo mal ha fumelen  
A zezir bea slaget gant ar memez chaden.  
Unan ane trivec'h via, an hini all pemzek  
Zo pell zo braz en hirvoud, c'hortoz be dimezet.

Ma et d'ar guer ma mignon, lar d'e dont d'an illiz  
Ha me ho interrojo var dern ar c'hatelis  
Pa ergoulet diante, a na ouient netra  
Demeus ar sakramanchou, ar re brinsipalla.

Filet d'ar guer bugale, evit eur bloa pe daou  
Da c'hortoz ma po desket dern ar zakramanchou.  
Neuze zavas e ziou skoa, me a gred a zonje  
An druez eo emezan, dimezi bugale.

Neuze a zeuont d'ar guer, o daou en eur ouela,  
Red ha vo d'eomp emezo, donet d'a studia,  
Red ha vo d'eomp studia, koulz an de hag en noz,  
Ma nouzomp ket re nevez, ni zisko ar re goz.

Tri pe bevar Miz goude a ia an intavez  
Da gaout an aotrou person da lard d'an tol evez  
Rag va merc'h zo languissant, eun tamik zo dija  
Sul vui avans he c'blevel ia bepred war velad.

Setu an aotrou person, d'ezí neus lavaret :  
Lavarit d'ezí dont c'hoas hag a vont dimezet.  
C'houi ha vad daou zen iaouank, a lavar ar person,  
Oa neum gonvertissa eb mont d'ar mision.

Ar memez Ira ez in bed dimezel hag eureujet,  
Gras da vea evruz keit a vont var ar bed,  
Bonheur a zeziromp d'ezí a vont er bed-ma  
Ha goude pa vont maro, er gloar da jouissa.

FIN

Corentin BOUARD.

Tous droits réservés :

Nicolas ROUZAUT.